

Chanson
Ar seiz Sqient naturel.

(281)

Var ton : Va flanedeg zo c'aled.

Apollon, Mercurius, Venus ha Jupiter,
C'houi a zalc'h var an douar ar garante sincer,
Hac a ra d'an dud yaouanc en em garout parfet,
Prestet d'in hoc'h asistans eur moment, mi ho ped.

Spererjou celestiel, astrou ar firmamant,
Ne a deu d'oc'h implori gant eur galon ardant,
Da rei din an talant'hon a bere meus exom,
D'explica ar proposiou arretet en c'halon.

Abostolet evurus, hanvet an Ebestel,
C'houi a ro instruction d'ar gristenien fidel;
Pa zoc'h choazet gant Doue vit prezeg e lezen,
Selaouit e grouadur, exocit va feden.

Rouanez ar garante, princes ar yaouankis,
Moyses ha Jeremi, cheffou eus an Ilis,
Ha c'houi, ca[r]ante dener, sourcen an deliqu,
Eus a gomzou elegant deut d'orni va quenou.

(282)

Ne c'houlennan get antre bars en theologi,
Na mont da guemer affer ouz an dud a studi:
Ar b'elleg, an arc'hescop, hac an den a bluen
Ne garfent get o enor divanva euz argen.

Bremañ me c'houlen avis an autoriteou,
Vit n'o devo^{get} a lec'h da rebech va c'homzou,
Hac evit c'aret repos, da furchal va speret,
E zan d'antrien en ilis lec'h ma voez badeet.

Patronez ar baros-mañ, va c'harante divin,

Prosternet on dirazoc'h var bennoù va daoulin,
Justret ganén va dasuarn, digor va daoulagad,
O sellet varzhu an én da c'houlén va mennad.

Güir Vab d'an Tad Eternel, va Zalver admirabl,
Me zo deus d'oc'h adori ouz treid ho tabernacl:
Disqennit, mar plij ganec'h, eur zell a drugare
Var an hini disterra domeus ho pugalé.

(283) Me a zo eun den yaouanc, savant ha dizourci,
Aboe 'm oad a zaouzec vloas o pourse va studi,
A meus c'hoant da zisclêria va bue maleürus:
Mar mancân dre ignoranç, e c'houlennân excus.

Me ho suppli, Genitor, mestr ar scrifagnerien,
Gemerit breman va dorn, cenduit va fluen;
Ha c'houi, Tad ar sclêrijen, porz vaer va speret,
Vit ma scrifin pen-da-ben va bue tremenet.

M'am bije bet eun talant vel en devoa Sant Pol,
Hac eur vouez gen agreabl evel eur rossignol,
Da rima eur zon neve, me lacje va speret
En enor d'am mestrez coant, va güir muia-carot.

Mes me a c'houlén faueur, aroc commanç ganti,
Rouanez an oll ælez, hac hini ar Messi,
Ar seiz sqiant naturel hac ar seiz planeden,
Da rêi din an asistanc da bourse va reglen.

Me meus choazet eur Vestrez, fleuren ar yaouanqis,
Brillantoc'h egued ar roz, egued ar fourdelis,
Agreaplloc'h da barlant eguet an æles memes.
Me gred n'e deus get e far bars er rouantelez;

(284) Genta m'am boe an enor da velet va mestrez,
E voa en pardon Sant Men, gant e c'hamaradez,
E vale hac e pourmen erit o fassetanc.
Eno e devoa riget va c'halon gant eul lang.

D'ar c'houlz-se me voa yaouanc, o commanç studia,
O pourse va avantur etouez ar re savanta:

Va c'horf a vije er skol, mes, allas ! va speret
gant ar boget ravissant a vije occupet.

Demous an oll scolaerien, me vaa, en assuranc,
Ar c'henta, ha goude-ze n'oan get erit arant;
Ha me o sonjal eun de monet betec he zy,
Gant eur galon languissant, da velet anezi.

Me ho salud, plac'h yaouanc, objet va c'harante,
Me a zo deut d'ho cavet an devez a hirie,
Erit caout eun tam amzer, mar be ho fantazi,
Da gonta dec'h va doare ha clêvet hoc'h ini.

Den yaouanc leun a furnes, me ho salud ive,
Vel m'o devoa grêt goechal ar Zent hac an dele,
Pere yê var o daoulin dirac ar Messias,
Var lein mene Calvari, pa vaa o touguen e groas.

Ober a rit din eun enor a veritan nebeut,
Gant ho comzou eloquant d'am gûelet pa zoc'h deut:
C'houi an hini a garân muia en assuranc;
Nemet da Zoue hepgen ne rofen preferanc.

(285)

Sellit Roue an ênvou ebars eur gador voenn,
Var lein mene Sinai o scrifa e lezen,
Dre behini e tifen ourz e oll bugale
Donet d'en em drabissa an eil hac equile.

Me a lavar dec'h certen amân, va zervicher,
Oc'h eus goneet va c'halon gant ho comzou tener:
Ha pa gafen mab eur prinç, evel ne garin get,
Ne zeziran nemedoc'h vit bea va frêd.

— Ho proposiou ravissant a blij din, va mestrez;
Joaüssat ra va c'halon, ma no'h get traitourez
Ne c'houlennân disarzoc'h gent egued ho quittä,
Erit ar vech genta - mân nemet ho c'raçou mad.

Harça - toi, va zervicher, poent ê demp finissa;
Me deu da lavarât dec'h gen a vo ar c'henta,
Ourz ho pedi da zonet adare d'am gûelet;

(286) Va grañ vad a vo ganec'h en peb lec'h ma yefet.
 D'an eilvet gñech, a gredañ, me a ya da vale,
 Gant eur speret qer contant vel hini an ðele,
 Da velet va mestrez coant, rouanez va c'halon,
 Pini a deu d'am peurgang a consolation.

Bonjour ha joa, va mestrez, rouanez ar fleurion,
 A quemet zo bet biscoas plantet ebars er vro,
 Brillantoc'h eget an eol, scleroc'h eget al loar,
 Ha puissanta plac'h yaouanc a zo var an douar.

Me a garje bea bet eloqanç Ciceron,
 Pe otramant ar furnes en devoa Salomon,
 Eur quenou gñet en arc'hant, hac eun teod alaouret,
 Da barlant en ho presanç, evel ma veritet.

— Pa oc'h deut betec amañ dre garante barfet,
 Me a rent dec'h ar zalud gant eun ha respet:
 M'am bije goñet ar feñon hac an tu da barlant,
 E vije va brassa joa plizout d'ho santimant.

Mes me zo eur plac'h yaouanc eus a speret dister,
 Ne meus biscoas studiet 'veldoc'h, va zerricher.
 C'houi a voar scrifa ha lenn, ha me ne ouzon get:
 N'ellañ get comz eveldoc'h, rac-se va excuset.

(287) — Va mestrez, c'houi zo furroc'h eget n'oa Salomon:
 Ma eljen-me disgeuz dec'h ar fonz eus va c'halon,
 C'houi pije gñelet enni gravet ar garante
 Pini a meus evidoc'h gant gñir sincerite.

Mar carit, e vimp hon daou unanet assambles
 Evel ma voa sant Joseph hac har Mam ar Verc'hez.
 Ma ellañ ho possedi eun de var an douar,
 Me a vo sur qer joaüs hac an ðeles er gloar.

— Me a zo eur femelen dister a galite,
 Disingal en ho qever, en madou, en ligne;
 Mes mar deo predestinet gant Doue eternal
 E vemp hon daou unanet, ne c'houlennañ get wel.

— C'houi eo fleurey ar merc'hed zo ebars er c'hanton.
Selaouit, mar [plij] ganec'h, me ho ped a galon,
Moerz an hini distera eus ho servicherien,
A c'houlenn eur mouchouer pe eun dabatieren.

— Evit merc a garante, va zerricher fidel,
E zan da glasc an alc'hoec da zigueri va 'rnel;
Hac e vije va c'halon ho pije goulennet,
Ma vije possubl he rei, n'em boa get refuset.

Tostait amañ bremañ, m'ho ped, va zerricher,
Cetu amañ var an dol pevarzec mouchouer,
Ha peder dabatieren olifant alaosret,
Ha c'hoas e zeus evidoc'h ousten ze, mar qeret.

(288)

— Me yêlo bréman d'ar quér gant eur galon contant,
Pa meus quélet, va mestrez, ho carantez ardant;
Ha mar partreget ganén lod eus ho carante,
Me respecto ac'hanoc'h enpad va oll bue.

— Gen a vo, cloarec yaouanc, ha va brassa mignon;
Hoc'h avison elocant a ravis va c'halon;
Eus a quement den yaouanc, o deus va darempret,
Ne meus caret nemedoc'h, ouz se bet assuret.

Va mestrez zo coant meurbet, hac e deus blêo melen,
E daoulagad gen ardant evel diou stereden,
E diou chod a zo gen rus evel m'eo eur rozen,
He muzellou zo rus-tân, e dent vel an erc'h quén.

Salud dec'h, va mestrez coant, gant enor ha respet,
Me zo deut betec ennoc'h gant eur galon barfet,
Evel ma voa ét goechal ar profet Daniel
Bete d'ar barados da gomz demeus eun ael,

Dre gommandamant Doue, evit goulenn ar graç
Da veva en e repos ebars eun hermitach;
Mes, allas! me zo eun den a zo bas a speret,
N'on get capabl da barlant evel ar prophetet.

(289)

— Me ho ped, va zerricher, tarit ho compliment,

Ho tiscoursiou admirabl hac ho comzou charmant.
 Rac pa deu sônj em speret er pezh a meus clêvet
 Penevent hoc'h asistat e voan disesperet.

— Me lavar d'êc'h, va mestrez, leun a confusion,
 Me garfe vec'h porcherez var doul d'êc'h va c'halon,
 Hac ho pe an alc'hozjou eus va oll secrejou;
 Rac ne garân nemedoc'h a guement zo er vro.

— N'ouffec'h bigen, va mignon, me lavar d'êc'h aman,
 Carout certen ac'hanon mui eguet n'ho carân;
 Gouscoude gant va c'herent e zeus din difennet
 Dre deodadou milliquet enep d'êc'h drouc-comzet.

— Qêlou trist hac estlami, grevus ha dirêzon,
 Te a blant eur c'hleze noaz ebars poul va c'halon!
 Me am boa grêt eur zônj caer hac a zo dispennet:
 Birvigen var an douar n'em bo repos ebet.

(290) O Majesté infinit, va Doue, va C'hrouer!
 Diouzoc'h ec'h implorân eur graç partitulier,
 An nerez coulz hac ar buissang e d'oa an intanvez,
 Pa zistrujas gant he dorn roue Holofernes.

C'hoas e c'houlennân oupen, evel den a verit
 Oll dalanchou ar profet ha roue bras David,
 Hac evel ma reas goechal, gent disgen er blenen,
 An impalaer Bonapart hac e officerien.

M'am bije bet ar pouwar hac ive ar buissang
 En d'oe goechal Sant Louis, pa voa Roue en Franç,
 D'exila ar goal-dêodou deus ar rouantelez,
 Em bije grêt an antêr eus va zilvidiguez.

Lennit ar Scritur-Santel, me ho ped, va mestrez,
 Hac e cafot rapportet var al levr a Furnez:
 An neb a gred goal-dêodou, zo diavis ha foll;
 Ne m'ân get var an douar an hini 'blij d'an oll.

Ma'eirius eo an hini a zo var an douar,
 Mar deu deân nezh fêzon coea en o fouwar;

264

Ha, sivoas, cazi an oll, abret pe divreat,
En peb amzer zo victim demeus eur goal-dêodat.

Ar Pab, en e gathedral, ar Roue, var e drou,
An avocat er studi, ar bèleq o sermon,
Hac ar barner arzet ebars en tribunal,
Zo sujet d'ar goal-dêodou qercoulz ha calz re-all.

(291)

Bremân e credân erwad ar peiz a meus lennet
En eul levr goal ancien, grêt gant ar Profetet,
Eo qer difficil beva dislam var an douar
Evel mont da fonz ar môr ha retorn var ar bar.

Pa deuy messajer Doue da draounien Josaphat,
Da separi ar re fall eus a vesq ar re vad,
Vo gûelet ar goal-dêodou dirac an assemble
O vont da bunq an ifern 'vit eun eternité.

Evit delc'hel ar sermant hor boa' grêt, va mestrez,
P'hor boemp hon daou an enor da barlant assambles,
Ez on deut d'ho saludi gant gûir fidelité,
Mes ne c'houlennân netra enep d'ho polonté.

— Arrêtât ho proposion bremân, va c'hamarad;
Sailla a ra va c'halon, berwi a ra va goad;
Hac evit prouvi d'c'h-u va c'harante parfet,
Mar qirit, me yel ganec'h el lec'h ma teizret.

— Grit reflexion var ze, me ho ped, va mestrez;
M'ho tigasfen ganén - me evel eun esclaves,
Ha donet d'oc'h eureuji hep conje ho ligne,
Ze a ve rebeclus din enpad va oll bue.

(292)

Mes, confortit ho calon; michanf gant an amzer
E tremeno o fulor qercoulz hac o c'holer;
Hac e vezimp unanet gant o c'honsantamont.
Calon ar plac'h voa qer trist, qen n'alle qen parlant.

Maleur vit an den yaouanc ne lezer aneân
Da zemezi, p'en deus c'hoant, d'an neb a blij deân!
Distrempet voa an douar eno gant hon daelou,

Gen a boullade an dour da garga hor boutou .

Me a deu d'ho supplia , tud yaouanc ar c'hontre ,
D'unani ho calonou assambles gant hon re :
Me am bo geuz ha glac'har o quittat va mestrez :
Geit ma vîn var an douar , n'he ancouaîn james .

Mes Doue a lavar demp er Scritur -Sacr errad :
Troc'hi 'rest ho torn ha tenna ho lagad ;
Goelloc'h eo mont gant eun dorn d'ar joayou evurus ,
Equet mont gant an daou zorn d'ar flamou grizius .

(293) He zad a lavaras din : Seit ...cetu eul lizer ,
Pini a meus recevet digant eur messajer ,
Hac e meus commission da rêi aneân dec'h :
Laqit -en en ho codel , ha cassit -en ganec'h .

Sc'lerijen eus an astrou , te zo hanvet al Loar ,
Disquen en fong va c'halon ha dizec'h va glac'har ,
Mar permet d'am daoulagad arretî va daelou ,
Da rapportî eur quentel enep d'ar goal -deodou .

Te a poa roet aris , teod infam ha funest ,
D'hon taid ha d'hor mam quenta er barados terrest
Da zebri demeus ar frouez difennet gant Doue :
Te zo qirriec d'hor mizer ha d'hon oll baourentê .

Ebars prison Pharaon te en devoa plantet
Joseph , ar zantela den eus ar batriarchet ,
Pa voe en faus accuset gant fried Putiphar :
Aboe m'eo crouet ar bed ez out var an douar .

Te attac an dud yaouanc , memes var o enor ,
Gant eur vouez gen eclatant a ya betec ar môr ,
Ha da lemel digante eun tenzor excelant ,
Preciusoc'h equet an dour hac ive an arc'hant .

(294) Abalamour d'e ligne , ec'h espermin Judas ,
Hac avañ bars en histor betec Herodias ,
Pini 'gouseillas he merc'h , dre eun aris traitour ,
Da gaout var eun assiet penn Sant Yan - Baderjour .

Lavar din, t'od milliguet, ha n'en dout get contant
 Bea guezet Mab Doue ha dibennet eur Tant?
 Pa out enpad an amzer o clasq dont da lagat
 Ar mein-be var an douar da rusia gant ar goad.

Ne bad pelloc'h va c'halon da brezeg varnean:
 Pardon ha mizericord me c'houlon oitân,
 M'en devo geuz ha glac'har demeure e bec'hejou,
 Ha m'en em gountessio bete fin e zeyou.

P'antreis em c'habinet gant desolation,
 En sonj da gavet eur dra a consolation,
 E yis da lenn al lizer am boa bet gant he zad:
 Pa deuis d'en digueri... O pebes calonad !...

Va c'halon zo glac'haret, va Doue, pa zonzân:
 Bet on e caout va mestrez vit ar vech diveân;
 Roet eo din va c'honje, scifet var baper ghienn
 Va c'hiittang en general d'he dilezel a grenn.

Me voe tri deiz ha teir nôs hep debri nac eva,
 Hac ive hep nep repos; ne renn nemet goela,
 Dre ma ~~renn~~ gen dilezel, hep bea meritêt,
 Ar fidela plac'h yaouanq anaveân er bed.

(295)

An drived deiz e scifas qêlou d'he c'hamarad,
 Ha me roas dêi respont eus a lizer he zad.
 « Pronocet eo an arvêt enep ho servicher:
 » C'houi yêl bremân d'ar goient, ha me chommo er quêr.»

Pa voan ebars va studi o sellet va levriou,
 Ne velen cazi banne, heuzet gant va dælou,
 E renqis o dilezel eno neuz e ractal,
 Ha me gomer va fusuill da vont da chasseal.

Eruet en creiz eur c'hoad, me a ma fatig bras,
 Ha me da quemer repos eno var ar yeot glas,
 Hac evel eur Vadalen commanq da zeplori:
 N'oa nemet Doue hepken capapl d'am c'honsoli.

En creiz va brassa glac'har, o sonjal em mestrez,

C'azj vel dre eur miracl e velis eun heyes,
En em strincas d'am daoulin evit va saludi,
Inspiret abers Doue da zont d'am c'honsoli.

(296) — Me ho ped, galant yaouanc, arretit ho taelou,
Ha laqit ho confianç en Grouer an ênvou:
Doue en deus ar pouvoar da gonsoli an oll;
An neb a fizio ennàn ne zeï bigen da goll.

C'houi a zo var an douar bars en displijadur,
Noc'h eus defot a netra, mar carit bea fur,
Ha mén a zo o vera ebars er forestou,
Hac a quemer plijadur oc'h uza va deyou.

Eno e collis memor eus va mestrez fidel,
Ha sônjal n'oamf] get choazet gant Doue eternal
Vit bea var an douar assambles unanet:
Graç demp da vea eun deiz en pales an Drindet.

Neuze 'retornis d'ar quên vel p'am biñ nijet;
Toma rê va goad ennàn, ne zantén get qerzet:
Va speret a voa qer scàn, va c'halon qer joaüs,
Evel ma zeo en ênvou an c'alez ervuus.

Mar boe goechal va c'halon carquet a gizesper,
Bremàn me zo qen êzet evel eun ali' hoeder,
Pini ya betec an ên hac a deu d'an douar:
Adieu d'am oll tourmantchou; êchu eo va glac'har.

(297) O madelez oll-buissant! Roue an oll c'ale,
Me rent d'êh presentamant graçou a drugare,
P'oc'h eus roet din ar c'hraç, Roue ar firmamant,
Da echui va chanson joaüs ha triumphant.

Homàn zo eur zon neve, rimet ha composet
Gant eur scrifaigner yaouanc demeus a Lanrodec,
Zo ganet ebars er bloa mil eiz cant hac ugent,
Deiz aroc Gouel ar Verc'hez a ve 'bars en Advent.

Evit explica e oad d'an oll dud ignorant,
Tri mis ha pèvar - ugent entuont da zaou - c'hant;

268

Ebars en canton Plouagat eo ganet ha maquet,
 Hac e hano scrifet mad zo Gilles Mordelet.

Ma meus lavaret netra 'grouc gant va fragilité,
 E c'houlennân calz excus, ha pardon ouz Doue,
 Hac ousten e tezirân da guement e c'hlevo.
 Ar bonneur da jouissa eus a c'hloar an énvou.

(Vol. VII, p. 284-297.)

82 strophes non numérotées.